

D'al Lun 20 a viz Genver 2025
e Roazhon

An treuzkas hag an implij eus ar brezhoneg hag ar gallaoueg Disoc'hoù ar studiadenn sokioyezhoñiel graet e 2024

Rannvro Breizh zo fellet dezhi kaout ur skeudenn resis eus yezhoù Breizh abalamour da vuzuliañ o emdroadurioù ha da c'houzout war beseurt tu ez a an traoù e Breizh. An enklask kentañ a oa bet kaset da benn e 2018. Ar strollegezh he deus goulennet nevesaat an enklask-se e 2024 ha kinniget e oa bet an disoc'hoù dilun e Roazhon, gant an ensavadur TMO, Paul Molac, kannad, kuzulier-rannvro, prezidant Ofis publik ar brezhoneg, ha Kaourintine Hulaud, kuzulierez-rannvro dileuriet evit ar gallaoueg. Er studiadenn e weler ez a an niver a yezherien war zigreskiñ, ar pezh n'eo ket souezhus pa seller ouzh krugell an oadoù, met lakaat a ra ur c'hresk war-wel evit an niver a dud a vez o teskiñ brezhoneg pe gallaoueg. Kompren a reer gant an titouroù nevez-se pegen talvoudus eo ar politikerezh yezh hag ar steuñv youlek evit adperc'hennañ ar yezhoù evit 2024-2027, bet degemeret a-unvouezh e dibenn 2023. Gant ar steuñv-se e vo klasket sachañ evezh ar re yaouankañ war ar brezhoneg hag ar gallaoueg abalamour da stummañ muioc'h a vugale er skolioù, hag a-hed ar vuhez, ha reiñ muioc'h a blas d'an div yezh-se er vuhez pemdez.

An dalc'h

« **Ur gwir deñzor, ur mad boutin d'an holl** hag ur perzh eus hon identelezh » eo **yezhoù Breizh** hervez **Loïg Chesnais-Girard**. Ha Prezidant ar Rannvro en deus lavaret ouzhpenn : « *N'eo ket un dalc'h hag a sell ouzh Breizh hepken : ar brezhoneg hag ar gallaoueg zo perzhioù eus **ar glad dizanvezel** a ranker gwareziñ ha lezel gant ar rummadoù da zont.* Un dalc'h eo war dachenn ar 'vevliesseurtes sevenadurel' ».

An hentenn

Graet e oa bet ar studiadenn-se gant an ensavadur TMO etre an 30 a viz Eost hag an 8 a viz Du 2024, dre bellgomz, ha graet e oa bet goulennoù ouzh 8 336 a dud hag a zo o chom er 5 departamant istorel a ya d'ober Breizh.

An disoc'hoù

> **Digreskiñ a ra an niver a yezherien** : 2,7 % eus an dud goulennetaet o deus disklêriet bezañ gouest da gomz brezhoneg mat-tre pe mat a-walc'h (-3 foent) ha 3,3 % evit ar gallaoueg (-1,8 %). E 2024 e oa 107 000 brezhoneger ha 132 000 gallaoueger mui-pe-vui.

> **Komzet e vez aliesoc'h** gant ar yezherien : 23 % eus ar yezherien oberiant a gomz brezhoneg aliesoc'h eget 10 vloaz zo, da lavaret eo e vuzulier ur c'hresk eus 11 poent.

> **Yaouankaat a ra oad keitat ar vrezhonegerien.** Oad keitat ar vrezhonegerien a oa 70 vloaz e 2018 hag aet eo da 58,5 e 2024.

Diazezet eo an disoc'h-se war daou lusk kontrol : diouzh un tu ez a an niver a yezherien war zigreskiñ e-mesk an dud en tu all da 70 vloaz (merventi) ; ha diouzh an tu all, e-mesk an dud dindan 40 vloaz, ez a war greskiñ (an dud 25-39 bloaz) pe e chom stabil e-barzh (an dud 15-24 bloaz).

Skañvoc'h eo al lusk yaouankaat evit ar c'hallaouegerien : tremenet eo an oad keitat eus 60 vloaz e 2018 da 56,5 e 2024.

> **Doareoù disheñvel da zeskiñ brezhoneg ha gallaoueg. Evit a sell ouzh ar gallaoueg eo bividik c'hoazh an implij hag an treuzkas er familhoù** (68 %) tra m'eo izel-tre dre an deskadurezh (17%).

Evit a sell ouzh ar brezhoneg e vez nebeutoc'h-nebeut a yezherien a-vihanik : digreskiñ a ra an treuzkas er familhoù (16 %, da lavaret eo - 10 poent), met **bras-tre eo plas an treuzkas dre an deskadurezh** (78 %, da lavaret eo + 10 poent).

> **Stabil eo c'hoazh feur an dud tomm ouzh ar yezhoù rannvro** : 64 % o deus disklêriet bezañ tomm ouzh ar brezhoneg, ha 43 % ouzh ar gallaoueg.

> Mat e vefe d'an dud gwelet **muioc'h a vrezhoneg hag a c'hallaoueg (er skinwel, er radio, er skol...)** met ankeniet int avat evit **amzer-da-zont ar yezhoù-se**. Hervez 49 % anezho e c'hallfe implij ar brezhoneg mont war greskiñ c'hoazh pe bezañ stabil ac'hann da 10 vloaz, a-hend-all e soñj da 69 % anezho e tigesko implij ar gallaoueg pe ne vo ket komzet ar yezh-se ken.

> **staget ez eus ur sintezenn dre ar munud hag ul liamm evit lenn ar studiadenn a-bezh**

Ar Rannvro a laka poan muioc'h eget biskoazh er mare tremen-mañ

Da-heul ar studiadenn gant TMO **e fell d'ar Rannvro delc'her da strivañ evit ar brezhoneg hag ar gallaoueg, ha mont pelloc'h ganti zoken**. Aet eo an niver a yezherien war zigresk, ar pezh a oa rakwelet diwar sellet ouzh krugell an oadoù. Met **panevel oberoù ar Rannvro er blegenn fall-mañ e vije bet brasoc'h c'hoazh an digresk**. Kompren a reer gant ar studiadenn sokioyezhoniel-mañ pegen efedus eo politikerezhioù ar Rannvro.

War hir dermen e vo douget frouezh gant ar **steuñv adperc'hennañ evit 2024-2027**, a oa bet degemeret e miz Kerzu 2023. Biskoazh ne oa bet ur steuñv ken bras evel hemañ : e 2027 e vo gouestlet tost da **13 M€** da yezhoù Breizh, da lavaret eo 3,6 M€ ouzhpenn e-keñver budjed 2023.

> **Evit a sell ouzh ar brezhoneg eo diorren ar c'helenn divyezhek** a ya d'ober kalonenn obererezhioù ar Rannvro bepred, asambles gant ar stummadurioù evit an dud deuet, ar skolaerien da gentañ-penn.

Gant ar Rannvro e vo lakaet ur stignad **skoazell d'ar stummañ** damstank en e sav evit an dud a zo o labourat, tra ma vo kresket ar sammad gouestlet d'ar stummadurioù war ar yezhoù evit an dud dilabour.

Gouestlañ a ra ar C'huzul-rannvro reiñ muioc'h a blas d'ar brezhoneg en holl lodennoù eus ar **vuhez pemdez**, war dachenn an implijoù **niverel** dreist-holl (kreñvaat ar c'horpusoù dave evit an naouegezh artifisiel, sevel arloadoù). Da skouer e oa bet lañset **Desketa**, ar savenn evit deskiñ brezhoneg, e miz Mezheven. Daougementet e vo ar goload arc'hant evit ar produiñ kleweled ivez.

Bep bloaz e vo lakaet kreskiñ ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg betek 11,3 M€ ac'hann da 2027.

> **Evit a sell ouzh ar gallaoueg** e lakay ar Rannvro diardennoù dibar e pleustr, abalamour da **lakaat kreskiñ kalz an niver a yezherien** oberiant. Rak-se e vo kreñvaat ar c'hevelerezh gant an Deskadurezh-Stad, ha dalc'het e vo kont eus ar gallaoueg er protokol etre ar Rannvro hag an deskadurezh katolik dindan gevrat.

Gant ar Rannvro ivez e vo skoazellet muioc'h ar c'hentelioù gallaoueg da zibab kinniget d'ar studierien gant skol-veur Roazhon 2. Adalek 2026 e vo kinniget ur stummadur war ar gallaoueg d'an dud deuet, hag a c'hall o stajidi priziañ ha testeniañ o live yezh gentañ.

Abalamour da lakaat ar yezh-se muioc'h war-wel ha da skignañ anezhi gwelloc'h, e vo brasoc'h-bras ar skoazell d'ar **c'hreizennoù dudi** gallaouek hag evit produiñ **programmoù kleweled**. Krog eo ar Rannvro ivez da staliañ **panelloù** teiryezhek en he savadurioù hag evit brudañ hec'h obererezhioù. Ouzhpenn-se e oa bet daou goulzad **kehentiñ** evit ar gallaoueg e miz Gwengolo e 2023 hag e 2024.

Dre ar steuñv adperc'hennañ e vo lakaet kreskiñ ar budjed gouestlet d'ar gallaoueg betek 1,6 M€ ac'hann da 2027.

Ar Rannvro eo ar strollegezh a laka ar muiañ a arc'hant evit yezhoù Breizh, dre Ofis publik ar brezhoneg hag Ensavadur ar gallaoueg a ra war-dro lakaat he folitikerezh yezh da dalvezout. Bep bloaz e vroud ivez ar strollegezhioù breizhat all d'ober traoù evit yezhoù Breizh, ha muioc'h-mui anezho a ya d'he heul, da skouer pa sinont ar **c'hartaoù « Ya d'ar brezhoneg »** ha **« Du galo, dame Yan, dame Vère »**, evit an implij eus ar **brezhoneg hag eus ar gallaoueg el lec'hioù foran**, peotramant pa sikouront paeañ oberoù kehentiñ, evel an oberoù evit ar gallaoueg a zo bet meneget kentoc'h.

SERVICE PRESSE

02 99 27 13 54 | presse@bretagne.bzh

Odile Bruley (06 76 87 49 57) | Sylvain Le Duigou (06 42 32 13 57) | Aymeri Bot (07 50 12 41 30) | Sébastien Jédor (06 22 49 94 69)

www.bretagne.bzh/espace-presse